

An didrouz

An didrouz a-hed an deizioù, ar mizioù
Ket an didrouz peoc'hus na distanus
Un didrouz e-kreiz trouz ar pemdez
Nann-lavar ar boan a-zeiz da zeiz
Korn bihan un daolig e-kreiz an dud,
Korn dister un daolig atav re vunut.

Skeudennoù ar voger o skarzhañ
Gwirionez kollet da vat, da viken
Nozvezhioù, leun ar spered da darzhañ
Daeroù ha daeoù, kement ha daeroù ken
Eñvorennoù bemnoz krisoc'h, stankoc'h
Warc'hoazh ' vo deiz, du ha teñvaloc'h.

An didrouz dibabet en diwezh, en aner
Kan ebet ken en ti, en aer, er penn
Sonerezh ar gerioù nijet kuit er pellder
Un dibab, ur boas adnevesaet, dibenn,
An disparti tremenet, ar peoc'h nevez savet
Ret ar wezh-mañ derc'hel penn, bepred.

Padrig Korle